

SENT AG AN NEAÑV

<p>1 Sent ag an Neañv deomp lârit, bremañ pand oc'h get Doue, Pe eurusted 'peus kavet àrlerc'h poan ar vuhez ? Den àr an douar n'hell kompren pegen bras eurusted Pe madoù a ro amañ hon Doue d'e amied.</p> <p>2 C'hwi, Apostoled Jezuz, hag en deus dilezet pep tra d'en heuli gredus, pe digoll ho peus bet ? Roet en deus kant 'veit unan ag ar madoù losket, Buhez peurbadel en Neañv, 'vel m'en doa deomp lâret.</p> <p>3 C'hwi-holl, Merzherion nerzhus 'veit ar feiz boureviet. Petra 'peus bet get Jezuz aveit ho kwad skuilhet ? 'Vel roueed e-kreiz ar gloar ni a zoug àr hon penn 'Veit ar briz ag hon viktoar ar gaerañ kouronenn.</p>	<p>1- Saints du ciel, dites-nous, puisque vous voici avec Dieu, quel bonheur vous avez obtenu après les peines de cette vie ? Personne sur terre ne peut imaginer la somme de bonheur et de biens que Dieu réserve ici à ses amis.</p> <p>2- Vous, les apôtres de Jésus, qui avez tout abandonné pour le suivre, quelle récompense avez-vous eue ? Il nous a rendu cent pour un des biens abandonnés : la vie éternelle, comme il nous l'avait promis.</p> <p>3- Vous tous, courageux martyrs, persécutés pour la foi, qu'avez-vous obtenu de Jésus pour votre sang versé ? Comme des rois de gloire, nous portons sur la tête la plus belle couronne de la victoire.</p>
---	---